

KANTIK

EN ENOR D'AN ITRON VARIA LOURD-ER-ZENT

Ab pardon bras zo d'ann eil zul a viz gouéré

Er Zent, parrez Sant Samuel,
Eur chapel gaer zo savet,
En énor d'ar Werc'hez santel :
Itron Varia Lourd hanvet.

DISKAN

Itron Varia Lourd-er-Zent,
Taolit Warnomp ho pennoz ;
Dalc'hit c'hanomp bepred en hent
Hor c'haso d'ar Baradoz

2

E kichen ar Vourc'h, én eur c'hoad,
En eun dachennig distro,
E z'eo evit an daoulagad,
Ar c'haera lec'h euz ar vro.

3

Deomp oll, Kristenien, d'hé gwélet
Gant feiz ha gant karantez :
Eno a vezimp sélaouet,
Gant Rouanez an Elez.

4

Hi eo Merc'h an Tad éternel
Mam hor Zalver binniget,
Ha pried ar Spéred-Santel ;
Dreist an oll Elez savet.

5

Piou biskoaz én dristidigez,
Hag en deus bet hé fédet,
Hep beza dré hé madelez
En em gavet fréälzet ?

6

An nep a zeuio d'ho pedi
Ebarz ho chapel nevez.
Grit, mar kavo dré-z'oc'h, Mari,
Ar peoc'h, ar joa, ar vuez.

7

Mar d'omp trubuillet, ankennet
Zavomp oll hon daoulagad,
E-trèzè hor Mam benniget,
Ken dous, ken tener, ken mad.

8

Mar glask Satan, hon enebour,
Hon toll d'ar pec'hed marvel,
Ni c'houlennno ganoc'h zikour
Guerc'hez à Lourd, Mam Santel.

9

O Mam Jesus, leun a zouster,
Enn hor poaniou, labourou,
Diskoeit bépred en hor c'héver.
Galloud bras ho pedennou.

10

Grit ma vezo dour ho feunteun
'Vit an oll dud enkrezet,
A iec'hed, a c'hras, eur vamen
'Vit ho dougen d'ho karet.

11

Ebarz ho chapel daoulinet,
Cwerc'hez a Lourd, o Mari,
Keuz hon b'euz da veza pec'het,
Pedit ho Mab 'vid'omp-ni.

12

Skuillet eta, Gwerc'hez Santel,
Ho kaëra donezonnou
Var ho servicherien fidel
Ho ped en ho ezomou

13

Rak bété hon-heur diveza
Ni fell d'omp, o Mam Santel,
Ho karet hag ho servicha,
'Vid'oc'h beva ha mervel.

14

Pa renkimp kuitaat an douar,
Pa vimp galvet gant Jezuz,
Mari, grit ma welimp é c'hloa
En é varadoz euruz.

Impr-matur :

JEGOUZO

Vikel bras